

E brezhoneg1

Keleier ar vugale d'al Lun 6 a viz Meurzh

Marion : E-pad ar vakafisoù omp bet e-barzh ur park o c'hoari gant ul luj.
Ur plac'h all oa ganin. Troet oa al luj ha kouezhet ar plac'h e-touez an erc'h.

Leun a erc'h oa 'barzh he lunedoù.
Disadom on bet adarre gant Sinead o riñklañ war an erc'h.

Louis : Bet omp oc'h ober un droiad betek lha-Gwilen. Gwelet 'meus givri bihan o c'henele eno. Roet 'm eus laezh da unan vihan.
En ur zont d'ar gêr 'm eus pignet ur razh ludez hag pesked ruz.

Sinead : Me zo bet o c'hoari gant al luj e ti Marion. Un tam aon 'm oa evit kregiñ. Da c'houde e yae mat an traoù ganin.
Axel a oa ivez o c'hoari. Kouezhet eo e-barzh ar pri.

Dec'h oa ur fest evit deiz a bloaz ar re vihan.
Ret e oa lakaat dilhad prinsez. Ne blijer ket re din.

Gwelet 'm eus ul louarn hag ul lapin.
Un oan bihan a zo ganet du-mañ.

Lucie : Me zo bet klafiv araok ar vakafisoù ha ur wech all c'hoazh da c'houde.

Tony : Bet on da welet kamaladed e kostez Gouezeg.

Er poull-neuial on bet e Kemper.

Lisa : Bet 'm eus seizh lapin bihan : unan koud ha re gwenn ha du.

Awena : Dec'h on bet gant Katell o welet he c'hezeg Horace hag Elsa. E-barzh ur park emaint war vord hent Sant Kadou.

Bet on gant Regis o pourmen e giez betek ar garreg a zo e krec'h Stang an nae.

Marion : En deiz-all e oan gant sandrine hag em boa klevet korn-boud ar bomperien o vont endro. Ne oa ket gwall-zarvoud ebet koulskoude. Bep Merc'her e vez lakaet ar c'horn boud en-dro da ober un taol-esae.

Stevan : Strinket m'eus bouloù erc'h war trakter Gaetan.



Tony

Keleier ar vugale d'al Lun 24 a viz Ebrel

Tony : Pemp logodenn vihan a zo bet du-mañ Digwener diwar ar barez »gerbille» am boa bet er skol.

Louis : Er poull-neuial on bet gant ma zad Disadom.



Da c'houde on bet gant Albin e ti Tad-kozh ha mamm-gozh Kastellin. Chomet on da gousket eno. Ifig ne gomz nemet brezhoneg ganin.
N'em eus poan o kompren anezhañ.

Marion : Tiphaine a zo deuet da c'hoari du-mañ Disadom. Tadig a oa o troc'hiñ ur wezenn.

Disul e oa abadenn al levrioù e Sant Riwal.
Ret e oa klask levrioù war-dro sal ar gouelioù.

O c'hoari on bet er vourk-gant ar vugale all.

Awena : Disadom omp bet o klask givri bihan e Kastellin. Ur par hag ur barez a zo. Pevar miz eo ar barez ha pemp miz ar par.

Nikolas en deus bet ur maout Disul.


Stevan : Deuet eo Jacqueline, c'hoar Gaetan, da Stumenven evit eizhtez. Florian a zo aze ivez.

Me a zo bet o c'hoari « pétanque » gant Maïna dindan ar glav.


Lucie : Digwener on bet e ti ma c'hoar o welet ur skipailh paotred o c'hoari mell-droad.

Diwezhat on aet da gousket : hanternoz oa.

Sinead : Disadom vintin, ma c'hoar a zo bet oc'h ober pone e Braspartz. Ret oa chom a-sav war ar pone.



Da c'houde omp bet er marchad e Montroulez. Pignet 'm eus ur gasketenn e Decathlon.
C'hoant 'm oa prenañ sandalennoù met va mamm ne faote ket dezhi.
Neuze omp bet da c'hoari e-barzh ar park e-kichen ar vagazenn.



E brezhoneg 2

Ar bugel bet laeret

Gwechall, e kêr Penn-ar-favod, e oa ur vaouez hag he doa seizh a vugale.
Gant an hini yaoukañ dac'h outo he doa un tammig poan benn, ankeniet e oa ; peogwir ar bugel ne vrasae ket, ne gaozae ket, hag ouzhpenn e fas en doa ul liv un tammig du, hag e oa ridet un tammig heñvel un den deuet en oad.

Hag un devezh oa deuet ur sonj dezhi : « Ha ma yafen da welet an aotrou Person da c'houlenn kelenn digantañ? », ar pezh en doa graet.


Deuet e oa hag he doa laret d'an aotrou Person penaos e oa he bugel.

Goude bezañ sonjet un tammig, an aotrou Person en doa lavaret dezhi :

« Me 'sonj din ar gorrikez he deus c'hoariet un dro louz bennak deoc'h. A-benn e vo un devezh labour, un devezh bras, un devezh mardeg marteze e Penn-ar-favod, c'hwilavaro emaoch o vont da ober boued d'al labourerien : youd silet 'barzh ur bluskenn vi.

« Ho, lavaras Chanig, an dra-se a zo un tammig drol, met memestra e vo gwelet ! »

Ur pennad goude-se, e oa devezh bras e Penn-ar-favod, triwech marrer a oa deuet.



Louis

Ha diouzh ar mintin abred, Chanig a lavare : « Bon, bremañ 'maon vont da ober boued neuze evit al labourerien hag emaoñ vont da aozañ dezho youd silet 'barzh ur bluskenn vi. Pa 'n oa lâret an dra-se, ar bugel a ne gaozee ket araok a oa kroget da vezañ un tammig ankeniet hag e oa koumanset da friantal un tammig bihan.

Ha Chanig he doa goulennet digantañ :

« Petra 'zo bugel, hag un dra bennak a zo hag a zispilj dit ? Pegwir e welan ac'hanout en em inerviñ 'giz-se !

« Ya, petra emaoch o vont d'ober ?

« Amañ 'z eus triwech marrer hiziv o labourat, hag emaoñ o vont d'ober dezho youd silet

'barzh ur bluskenn vi.
« Ho, a lavaras ar bugel, me 'm eus gwelet mez 'barzh ar gwez, mat da ober sol an ti, met morse n'em eus gwelet ober boued da driwech marrer 'barzh ur bluskenn vi !

« Ha, e lavaras Chanig, me 'sonj din an aotrou Person en deus gwelet mat ! Mat, marteze paotr, peogwir emaoñ abred diouzh ar mintin oc'h ober boued, ni a yelo d'ober un dro, m'ar karres on daoù, da Benn-ar-roc'hig.

E Penn-ar-roc'hig, ez eus un dorgenn, fas da goad an Nivod, el lec'h ez eus ur roc'h, hag a zo

anvet toull an diaoul.

Pa oa degouezhet e Penn-ar-roc'hig, Chanig a

generas un tamm bod balan d'ober ur wialenn da fouetañ ar bugel.

Heñvel-just, ar bugel n'e doa ket bet morse droug ebet, bet taol bazh ebet, a oa koumanset da grial, da skrijal memes, pa oa koumanset Chanig da reiñ bazhadoù dezhañ war e feskennoù.

Ho, n'he doa ket bet pell da c'hortoz, e klevas trouz e touez al lann. Petra he doa gwelet o tont ? Ar gorrikez gant ur bugel brav, gant lagad glas ha blev melen, ur paotr brav kenañ, hag he lavaras da Chanig :

« Gwir e, me oa bet un devezh o kerc'hat ho mab e-barzh ar c'havell ha 'm oa lakaet ma hini en e blas. Hag e c'hellan lâret deoc'h ne 'm eus ket bet roet bazhadoù dezhañ na graet droug ebet heñvel ho peus graet da ma hini. « Ma, a respontas Chanig, petra 'm eus da lavaret deoc'h neuze ? Bennoz Doue ha trugarez marteze neuze !



Bet kontet gant Jeanne Mao (2006)